

AR STAGELLOÙ  
AN ARAOGENNOÙ  
AN ADVERBOÙ

LODENN

5







## AR STAGELLOÙ

### kentel

1

**Ar stagelloù a zo gerioù implijet da liammañ div lavarenn pe div lodenn ul lavarenn pe daou rummad lavarennoù.**

2

**Pa vez ar gerioù liammet evel-se war an hevelep live, e vez graet gant **stagelloù kenurzhiañ**.**

Yann ha Mari a laboure hag a c'hoarie asambles.  
An amzer a zo tomm met avel vras a zo.  
Laouen on rak trec'h on bet war ar re all pa oamp o c'hoari domino.

3

**Pa vez ereet div lavarenn, an eil o vezañ dindan dalc'h eben, e vez graet gant **stagelloù isurzhiañ**, pe hep stagell ebet.**

Gortoz a ra ma breur e tremenfe en tren.  
Klañv e oa Fañch abalamour m'en devoa debret re a chokolad.  
Pa rae erc'h ez aemp, bemdez da vale war skioù.  
Mont a rin da neuial gant ma vo tomm a-walc'h ar mor.

## dalc'hit soñj

### stagelloù kenurzhiañ

Ha, hag

Na

Pe

Met

Hogen

Rak

...

### stagelloù isurzhiañ

Na

Ma

Hag-eñ

E-lec'h ma

Goude ma

E-keit ha ma

Bep tro ma

A-raok ma

Abaoe ma

A-boan ma

Peogwir

Dre ma

Abalamour ma

O vezan ma

E doare ma

Evit ma

Gant aon na

Evel ma

Hep ma, hep na

Daoust ma

Pa

Ma, mar

Gant ma

Nemet ma

Hervez ma

Zoken ma

...

# poelladennoù

1

Savit ur frazenn gant div lavarenn kenurzhiet en ur ober gant **ha, met, hogen, rak**:

Aet e oamp da Vrest. Riellet e oa an hentoù.  
Skuizh eo ma breur. Kerzhet en deus re vuan.  
Trouzus eo ar c'hlasoù. Ar mogerioù zo tev a-walc'h.  
Ho kaieroù zo naet-tre. Skrivañ a rit brav.  
Bez' emañ ar vugale ouzh taol. N'eo ket prest merenn.  
N'on ket erruet e fin da levr. Lenn a ran buan.

2

**Ijinit dibenn ar frazennoù-mañ:**

- Daoust ma oa brav an abadenn sonerezh
- N'em eus ket degaset ma c'haier peogwir
- Mont a raimp da Vrest goude ma
- Na dostait ket re ouzh ar c'hi-mañ gant aon ma
- A-boan ma oa ehanet an tren en ti-gar
- Mont a ra Tadig da Vontroulez bep tro ma

3

### Islinennit e ruz ar stagelloù-kenurzhiñ, e glas ar stagelloù-isurzhiñ :

Bep tro ma welan ul labous e klaskan e anavezout.

Trist e oa an dud rak ar c'heloù a oa fall.

O vezañ ma n'eo ket niverus an arvesterien e vo daleet an abadenn-mañ.

Ret eo distagañ ar wastell diouzh ar plad a-raok ma vefe yen.

E keit ma viot ganin e vo desket kanañ.

Gwiskit ur vantell pe ur chupenn.

4

### Stankit an toulloù gant stagelloù-isurzhiñ :

Kavet hon doa ul labous..... oa kouezhet war an hent.

En em c'houlenn a ra Yann..... e teuio e gamaladed.

Ne oan ket deut amañ..... oa echu al labourioù.

Ne oar ket Mari..... e krogo ar c'hoarioù abred.

..... vez ma zad o labourat, ne blij ket dezhañ bezañ direnket.

..... bezit sioul e c'hellot dont du-mañ da sellet ouzh ar skinwel.





30



## AN ARAOGENNOÙ

### lennadenn

Jani a selle **outañ** o tebriñ hag o komz e-unan **hep** gortoz respontoù. **Eviti** da chom **hep** debriñ ez azeze **ouzh** taol **gantañ evit** e adlein. Ur boaz e oa **abaoe** o eured daou vloaz 'oa. Fellout a rae **dezhañ** kaout unan bennak **dirazañ** pa veze **gant** e bred...

Treiñ a reas **evit** reiñ tonenn e damm kig moc'h d'ar c'hazh a oa o paterat **en e gichen** hag e troc'has **war** e bouezig un tamm kig all.  
- Ret e vo **din** goprañ unan bennak da faoutañ ar c'hefioù-se, **emezañ** en ur sellout **ouzh** an avalenneg **dre** ar prenestr digor. **Abaoe** an amzer!

(diwar AN IRIN GLAS - R. HUON)

### goulennoù

Adsavit an destenn evel ma vije Yann e-lec'h Jani, hag ur vaouez gantañ e-lec'h ur paotr.

## kentel

1

**An araogennoù a zo gerioù lakaet dirak gerioù all evit o liammañ ouzh gerioù all o tont en o raok.**

**Setu ur roll eus an araogennoù pennañ :**

A, EUS  
DA  
DAVET  
DINDAN  
DRE  
E(EN)  
EGET  
E-GIZ  
EVEL  
EVIT  
EME  
GANT, DIGANT  
HEP  
HERVEZ  
NEMET  
OUZH, DIOUZH  
RAK, DIRAK  
WAR, DIWAR  
ETRE  
E-KICHEN  
WAR-LERC'H

2

An darn vrasañ eus an araogennoù a c'hell bezañ displeget. Setu displegadur un nebeud anezho :

a	evit	e (en)
AC'HANON AC'HANOUT ANEZHAÑ ANEZHI AC'HANOMP AC'HANOC'H ANEZHO/-ZHE	EVIDON EVIDOUT EVITAÑ EVITI EVIDOMP EVIDOC'H EVITO/EVITE	ENNON ENNOUT ENNAÑ ENNI ENNOMP ENNOC'H ENNO/ENNE

war	dre	rak
WARNON WARNOUT WARNAÑ WARNI WARNOMP WARNOC'H WARNO/WARNE	DREZON DREZOUT DREZAÑ DREZI DREZOMP DREZOC'H DREZO/DREZE	RAZON RAZOUT RAZAÑ RAZI RAZOMP RAZOC'H RAZO/RAZE

da	ouzh	gant
DIN DIT DEZHAÑ DEZHI DEOMP/DIMP DEOC'H DEZHO/DEZHE	OUZHIN OUZHIT OUTAÑ OUTI OUZHIMP OUZHOC'H OUTO/OUTE	GANIN GANIT GANTAÑ GANTI GANEOMP/-IMP GANEOC'H GANTO/GANTE

3

### Disheñvel-krenn eo displegadur araogennoù 'zo evel:

e - kichen	war - lerc'h
EM C'HICHEN	WAR MA LERC'H
EZ KICHEN	WAR DA LERC'H
EN E GICHEN	WAR E LERC'H
EN HE C'HICHEN	WAR HE LERC'H
EN HON C'HICHEN	WAR HON LERC'H
EN HO KICHEN	WAR HO LERC'H
EN O C'HICHEN	WAR O LERC'H

# poelladennoù

1

## Implijit an araogenn a zere :

Sellet a reomp..... ar skinwel.

Aon am boa..... ar c'hi du.

Soñjal a reont alies..... o c'henvreudeur divroet.

Mont a ra Yann da vale..... e dad.

..... vloaz..... vloaz e kresk ar vugale.

Chikan a vez bepred..... an div c'hoar.

2

### Displegit an araogennoù :

- Ul lizher a gasin..... (da 2U)
- Parañ a rae he selloù du..... (war 1U)
- «Deuit amañ, diouzhtu!»..... (eme 3U Gourel)
- Ne sell ket an afer-se..... (ouzh 2L)
- Degaset o devoa o seier-kousket..... (gant 3L)
- Eus a-bell e terede ma c'hi..... (davet 1U)
- Erruet e oa..... (war-lerc'h 1U)

3

### Hevelep labour :

- Brasoc'h int..... (eget 1L)
- Chomet e oa ar boliserien..... (dirak 3U gwregel)
- Mamm-gozh he deus fardet ur wastell..... (evit 2L)
- Liza e oa ar plac'h..... er c'hlas. (nemet 3U)
- ..... e vefe tommoc'h an amzer warc'hoazh. (hervez 3L)
- Mar n'hoc'h eus ket ho levr e rankot ober..... (hep 3U)
- Azez..... (e-kichen 3U gwregel)







## AN ADVERBOÙ

### kentel

**An adverboù a zo gerioù a dalvez da resisaat an doare ma vez graet an ober merket gant ar verboù.**

Debriñ a reont buan.  
 Aze e oa ma sac'h bremaik.  
 Dec'h o doa kanet a-gevret.  
 N'ez aio biken da vevañ e kêr, emezañ.  
 Gwall glañv eo he mamm-gozh.  
 Ne voe ket pell an erc'h o c'holeiñ an douaroù.

**Bez' ez eus adverboù o verkañ  
 al lec'h,  
 ar mare,  
 an neuz,  
 ar c'hementad  
 ...**

### Adverboù o verkañ al lec'h :

Aman, aze, ahont, eno  
Du-man, du-se, du-hont, di  
Er-maez, en diavaez  
E-barzh, en diabarzh  
En nec'h, d'an nec'h, el laez, d'al laez  
En traon, d'an traoñ, war-draoñ  
A-zioc'h, dreist  
Dindan, a-zindan, dre zindan  
War c'horre  
War-raok  
A-dreñv  
Dirak, a-zirak  
War-lerc'h, a-ziwar-lerc'h  
Tost, a-dost  
Pell, a-bell, a-ziabell, eus an diabell  
E-kichen, dre gichen  
A-greiz, a-douez  
A-ziwar-dro, war-dro, a-dro-war-dro  
A-gleiz, a-zehoù

...

### Adverboù o verkañ ar c'hementad :

Ken, kement, kement-mañ, kement-se, kemend-all  
Kalz, nebeut  
Muioc'h, nebeutoc'h  
Ar muiañ, an nebeutan  
E-leizh  
Nemeur  
Mui  
Kennebeut, kepken, hepmuiken  
A-walc'h  
Re  
Hanter  
..... -tre  
..... -kenañ  
..... -meurbet  
..... -holl

...



### Adverboù o verkañ ar mare :

Bremañ, hiziv  
Gwechall, warlene, dec'h, derc'hent-dec'h,  
ergentaou  
Emberr, fenez, henez, warc'hoazh  
Disul, dilun, ...  
Er mare-mañ (-se), d'ar c'houlz-mañ (-se)  
Diouzh ar mintin, diouzh an noz  
Betek bremañ, betek-henn  
Ken neuze, a-benn neuze, a-benn breman  
Goude-se, adalek bremañ, adalek neuze  
Hiviziken  
Pell, pell amzer  
Keit-se, keit-ha-keit  
C'hoazh, da viken, a-viskoazh, biskoazh  
Morse, gwech ebet  
A-wechoù, ur wech ar mare  
Ral, dibaot  
Meur a wech  
Alies, peurliesañ, peurvuiañ  
Bepred, bemdez, bemnoz  
Dalc'hmat, atav  
Adarre

### Adverboù o verkañ an neuz :

Evel-henn, evel-se, evel-hont  
E-giz-mañ, e-giz-se, e-giz-hont  
E pep doare, e doare ebet, e doare pe zoare  
A-dreuz, a-gevret, a-zevri, a-sav  
...

## poelladennoù

1

**Klaskit hag islinennit an adverboù er frazennoù-mañ (meur a hini zo e frazennoù 'zo):**

- Mont a ra ar c'hirri re vuan.
- Pignat a ra Nerin d'an nec'h.
- C'hoant am befe da sellet a-dost ouzh al labous-mañ.
- Ne zistroin biken d'am bro !
- Deuit du-mañ da zebriñ koan !
- Diouzh ar mintin e savan abred.
- Peurliesañ e labouront er gêr.
- A-wechoù e vez erc'h oc'h ober e miz Ebrel.
- Chomit a-sav!
- Goude-se e c'hellot mont kuit.
- Brav-kenañ eo an taolennoù livet-se.
- Glac'haret-holl e oa ma breur.
- Ne zeuont ket alies d'ho kwelet!
- Ne chom mui netra da zebriñ.
- C'hoari e-leizh o deus graet hiziv.
- Biskoazh n'em boa debret ken mat!
- Adalek bremañ e vo difennet a-grenn chom er c'hlasoù.
- Warc'hoazh ez aimp d'ar fest-noz e Boulvriag.
- E-keit-se e oa ar vugale o c'hoari kanetennoù.
- Pell amzer hoc'h eus lakaet!
- Deredet e oa ur bern tud a-ziwar-dro.
- Bez' emañ ma mamm-gozh en ospital, mont a rin di d'he gwelet.
- Uhel eo ar gloued, diaes eo mont dreist.
- A-greiz-holl e oa ehanet ar glav.
- Deuit er-maez !
- Amañ e c'hellit azezañ.
- Kit kuit alese!
- Ne reomp ket evel-se.
- Bemnoz e kleve Klet ur gaouenn pell du-hont er c'hoad.
- Meur a wech em eus lavaret deoc'h chom hep ober trouz.
- N'hoc'h eus ket echuet ho labour c'hoazh?
- Dilun ez aio Per da Roazhon.
- Gwiskit ho mantilli a-raok mont er-maez.
- Abaoe dec'h e oar Loeiza mont war varc'h-houarn.
- E doare pe zoare e vo ret deomp treuziñ ar stêr.